

Goude ar C'honit

164

WAR DON KANTIK AR BARADOZ :



D'ann drompiler Th. BOTREL

« Jezuz, pegen braz ve »

Pa zistrofomp enn dro,
Lorc'huz-braz ha seder,
Sonit, kléier va bro,
Kan huel, alc'houéder !

} bis

'Vel vo fin d'ar brezel,
D'ar muntr ha d'ar glac'har,
Roit d'omp diou eskel
Da nij, Ele dispar !

} bis

Pa zistrofomp enn dro,
Eunn devez lugernuz,
Ar Vorgân a iudo
Eur sonik dudiuz !

} bis

Spered ann henchou doun,
N'oa kolled hor roudou,
A drido he galoun
O klevout hor boutou.

} bis

Hag ann oabl a stegno
Dantelez alaouret
D'ober kurunenno
D'ar gwella soudardet.

} bis

Ar vamigou tener
Diredo war an or
Evit hon digemer
Enn ho ziou vrec'h digor !

} bis

Eunn nebeut amzer c'hoaz,
Ni welo adarre
Hor zoennou mein glaz
Ha menciou Are !

} bis

O na kaëra devez
Pa zistrofomp enn dro !
Kanit al levenez,
Sonit, kléier va Brô !

} bis

JOSEF IAKOB.